




E ILIZ LOKORN.

PHOTO JOS LE DOARÉ

Bleun-Brug

Niv. 65 (Mensuel)

Abonnement : 500 Francs

DU 1953

RANDONEREZ !

Darn a gav bras e ve kaset d'ezo eur paper arc'hant goude ma vezomp bet meur a viz, awechou meur a vloaz, o c'hortoz diganto o c'houmanant. Eun doare es eo koulskoude da baea an dle, hep rankout mont d'ar post. Gounit mat a ra al lenner, an 50 lur ouspenn a rank da baea. D'eomp-ni avât, eo eur c'holl amzer hag eur c'holl arc'hant. Ha petra da lavaret eus ar re a nac'h reseo ar baperenn-se ?

Sonjit ez eus 600 lenner ha n'o deus ket c'hoaz paet o c'houmanant 1953 !!! — 100 all a dle d'eomp o c'houmanant 1952 !!! — Bezit sur, ar mouler ne c'hortoz ket keit all e notennou ! Gant kement a leziregez, penaos e harpimp a gav d'eoc'h ? « *Bleun-Brug* », siouaz ! ne vev ket diwar goust aer an amzer.

Ar re n'o deus ket respontet d'ar baperenn ziweza hon eus kaset d'ezo evit koumanant 1952, a resevo eur paper-arc'hant e-kerz miz Kerzu. O fedi a reomp d'ober eun digemer mat d'ar paper-se ha da baea raktal d'ar faktour.

Ar re a vank d'eomp o c'houmanant 1953, a resevo da heul niverenn miz Kerzu, eun ali, hag er miz warlerc'h, ma n'o deus ket paet, eur paper-arc'hant.

Nac'h paea e goumanant, goude beza resevet ar gelaouenn e-pad bloaz evit netra, a zo eun dizonestiz.

V. SEITE, « *Bleun-Brug* », Châteaulin (Finistère), C.C.P. 544.22 Nantes.

TAOLENN

Kenteliou ar vered	1
Ar maro hag ar Vretoned	3
An emgavadenn ziweza	5
Dellig ar vinorez	6
Per Kant	7
Al Labour-douar	8
Daoulagad ar vamm	9
Pennherez Ploneve-Forze	10
Kornig ar vugale	13
Keleier : Hor skol dre lizer	14
Ar brezoneg er skol	15
Goueliou breizat	15
Buhez ar Bleun-Brug	16
Korn al liziri	17



Bennoz Doue a lavaromp da H. Gaouissin, evit ar c'hlichedou a ro d'eomp alies da skeudenna hor c'helaouenn, evel ar re a zo en niverenn-mañ.

KENTELIOU AR VERED

« Eus ar bez e vouez a sav atao. »

(Pennad tennet eus ar brezegenn gaer graet e Radio Roazon gant an Aotrou Yann-Vari PERROT, da c'houel an Holl-Sent 1941.)

... N'eo ket e Breiz, a drugarez Doue, eo e vez ankounac'haet ar re varo, kerkent ha ma vezont aet diwar wel.

Pardon an Anaon dreist-holl hol laka da drei hor sellou war-du ar vered.

Kement a verejou nevez a ranker digeri bremañ gant ar walenn a gastiz ma 'z'eo ar brezel ma klever tud o lavaret : « D'aoust ha n'eo ket fin ar bed eo a zo o tont ? »

Va breudeur ker, fin ar bed a deuy pa ne welo mui an Aotrou Doue na feiz, nak esperans, na karantez, war an douar ; n'oar ket en em gavet eno c'hoaz, a drugarez Doue.

An tri deñzor-se m'ho peus o c'hollet, klaskit int e tal beziou ho tud ; eno o c'havoc'h : met, pa 'z'it d'ar vered, na rit ket evel an dud dizoue ; na jomit ket en ho sav, sounn evel eur peul ha mut evel eur pesk ; kemerit dour benniget, daoulinit ha pedit.

Eun dra all da ober e tal ar bez, ha war an dra-mañ hepken e pouezin fenoz, eo selaou kenteliou ar Vered ; **ar re varo a gomz atao** hag ar c'henteliou a roont, p'o selaouer ervat, eus eur c'hristen laosk a ra eur c'hristen mat hag eus eur c'hristen mat a ra eur sant, ar pez a garfen ober eus kement hini am selaou bremañ.

Va breudeur ker, e tal beziou ho tud m'ho peus her c'hollet ha ma kirit her c'hask, e kavoc'h teñzor ar feiz.

An den gant e gorf hag e spered a zo eur bed bihan eun tamm mat kaeroc'h eget ar bed bras a zo en dro d'ezañ ; pa dro da vat an traoù gantañ en devez c'hoant buan a-walc'h da dremen hep Doue ha da ober evel ma ne vije ket Hor Salver Jezuz-Krist mab Doue marvet evitañ war ar groaz. Barrek ec'h en em gav e-unan ; o truez ! na pebez dallentez !

Pa zell ouz beziou e dud ha pa wel an dachenn a berc'henno e-unan dizale, pa bleustr war ar meutadig ludu a jomo eus e gorf a-benn eun nebeut bloaveziou, an den a goll e lorc'h hag en em c'hra bihan, evel eur bugel ; chom a ra en e renk.

II

Va breudeur ker, e tal beziou ho tud m'ho peus her c'hollet ha ma kirit her c'hask, e kavoc'h teñzor an esperans...

E tal ar bez epad ma tiskenner ennañ ar c'horf, an Iliz a laka kana komzou Hor Salver e tal bez Lazar : « Me eo an hini a ra d'an dud sevel eus a varo da vezo ; me eo ar Vuhez ; an hini a gred ennoun ha goude ma vefe maro a vevo, ha kement hini a vev hag a gred ennoun ne varvo ket evit atao. » (S. Yann II. 5.)

Nak a shlerder a daol ar c'homzou-se e teñvalijenn hudur ar bez,

An ene ne varvo ket ; n'hell ket mervel ; ar c'horf a varvo, met ne ray, e gwirionez, nemet ober an neuz da vervel ; breina a rank e nant-chou ar vered, met ne vreino eno nemet evel ma vreina ar gwiniz e nant-chou ar park araok glazvezi ha diyeodi dindan heol an nevez amzer ; lagad Doue hen heulio, her miro hag a ouezo e pe lec'h e vezo pep tamm anezañ.

Na pebez esperans, a laka kalon ar c'hristen da dridal hag a ro nerz d'ezañ da c'houzañv poaniou ar vuhez-mañ hag a ra d'ezn gwelet, war e dremenvar, evel ma lavare Yann Ber Calloc'h : « e poullou digig an Ankou daoulagad doueel an Hini laketa e kroaz... ».

III

Va breudeur ker, e-tal beziou ho tud, m'ho peus her c'hollet ha ma kirit her c'hask e kavoc'h teñzor ar garantez.

E-tal ar bez eo e welomp pegement a ezomm hon eus eus a Zoue. Ne jomfemp pennad ebet, en hor sav, ma n'hon dougfe ket war balv e zorn ; pennad ebet beo ma n'hon harpfe ket heb ehan.

Penaos neuze chom hep karet eun Doue hag a zo ken dleet all e garet ?

An dud a gar Doue a zo eun dudi beva en o serr ; n'eus ket laouenoc'h egeto ; atao emañ ar mouz c'hoarz war o diweuz, zoken e-kreiz o brasa trubuilhou.

E-tal ar bez eo e weler pegen berr eo ar vuhez ; tremen a ra evel eul luc'hedenn ; etre kayell badiziant ne vern piou, hag e gavell bez, n'eo ket lur an hent.

Ha perak neuze p'eo ker berr an amzer hon eus da dremen amañ beza dalc'h mat oc'h en em hegal etre tud eun ti, etre amezeien, etre kenvroiz ?

E-tal ar bez eo e vez keuz da veza bet re c'haro evit ar re a zo bet war hon tro ; eno eo e weler n'eus nemet eul lezenn hag e vefe ret he anaout, he miret, he skigna : lezenn ar garantez.

« Teir vertuz kaer a zo ret o c'haout er bed-mañ, eme Sant Paol, ar feiz, an esperañs hag ar garantez, met ar vrasañ anezo o zeir eo ar garantez... »

Breiziz, bezit ar pezh m'eo bet ho tadou ha mirit evel do, en ho touez, tri deñzor kaer ho pro, ar feiz, an esperañs hag ar garantez, an tri deñzor n'eus nemet da c'hellout kinnig d'an Aotrou Doue, pa z'eoc'h diwar dreuzou ar bed-mañ, evit kaout dor zigor digantañ en e Varadoz, ar c'hras a vennañ d'eoc'h holl, en ano an Tad, ar Mab hag ar Spered Santel, evelse bezet graet.

Y.-V. Perrot,
Tad ar Bleun-Brug.

Niverenn ar mix a zeu a vo penn-da-benn diwarbenn Tad ar Bleun-Brug, an ao. Perrot. Dek vloaz a vo dan 12 a viz Kerzu abaoe m'eo bet drouklazet. Dalc'homp sonj ! Goulenn a reomp digant ar veleien a c'hell, lavarout evitañ o oferen, d'an 12. Ha digant ar re all, kaout eur sonj evitañ e-doug oferennoù ar sul 13. Ni, diouz hon tu, a gaso gwerz eun oferen evitañ d'ar seiz eskopti ha da Landevenneg.



Cliché Oloie

AR MARO HAG AR VRETONED

« D'omp d'ar garnel, kristenien, gwelomp ar relegou.
Eus hor breudeur, c'hoarezed, hon tadou, hor mammioù. »

Lies a wech hon eus bet tro da gana ar werz-se, ha ganti, marteze, eo bet diruilhet an dour eus hon daoulagad.

Sonjal en hon tud karet aet diouzomp, a vez atao fromus da galon tener ar Breizad.

N'eo ket, avat, dre m'hon eus-ni aon rak ar maro. E bro ebet n'ez eus muioch a zoujañs evitañ. E bro ebet n'eo bet ken enoret eget e Breiz.

Ar maro, pe kentoc'h an Ankou, a zo amañ evel er gêr. Beva a ra ganeomp, en hor spered, en hor c'halon, en hor pedennoù, en hon ilizou, en hon ti zoken.

Azeza a ra ouz hon taol ha gourvez en hor gwele, ha deuet eo d'eomp da veza evel eur breur. Ar pezh a lakae Kalloc'h da skriva :

« Sonjal en traou maro eo ma flijadur... »

Dre m'o doa hon tud ken bras doujañs evit ar maro, eo o deus bet savet pedennoù ken kaer evit noz-veilh an anaon, bet dastumet, darn anezo, a drugare Doue, gant Yeun ar Gow, en e levr kaer « Ar Grasou » (1).

Gant ar maro, e teue o zi da veza evel eun iliz, noz ha deiz, eun iliz a sioulded hag a bedenn, eur chapel wenn, warni dija liou ar Baradoz. Hag ar pok diweza laketa war dal ar c'horf maro, araok kuitaat e di er bed-mañ, a zo eun akt a esperañs d'her c'hiavout en tu all d'ar bez.

Aet kuit, an eñvor anezañ a chomo dre holl e-barz an ti. Kement a vezo bet d'ezañ a vo espernet evel gant devosion, ha bemdez diouz an noz, ar familh bodet, a bedo evitañ.

En eur vont d'ar vered e vo laketa da bokat d'ar groaz pe d'an daol santel, ha diskennet en dour yen, ne vo ket dilezet.

Emañ an iliz e-kreiz rouantelez ar maro evel eun tour-tan da ziskouez an hent a gas dreizañ da rouantelez ar vuhez peurbadus.

Ken start e krede hon tud er wirionez-se, ma 'z oa evito, dor ar vered, evel dor ar Baradoz. Evit diskouez kement-se, eo o deus bet savet war o beredou, doriou a enor, e meur a barrez, evel e Sizun, Pleiben, Sant-Tegonneg...

(1) Al levr-se a zo diviet. Met embannet en deus Yeun ar Gow, eul levrig all : « Pedennoù da lavaret dirak ar re varo ». Her goulennit digant : M. Le Goff, notaire, Gouézec (Finistère).

E pelec'h avat, ez eus bet savet d'ar maro paleziou kaeroc'h eget darn eus karneliou Breiz-Izel ?

Eno eo emañ garanet, er vein gallet, evit ar c'hanvejou da zont, testeni doun karantez hon tud evit o re dremenet.

E penit kenta ar c'hantved-mañ, e kaved c'hoaz e eskopti Kemper ha Leon, 77 karnel.

Mantrus eo, e vefe bet lezet da goueza, pe diskaret meur a hini anezo abaoe. Ha chomet oc'h bet, eur wech bennak a-sav da arvesti ouz unan pe unan eus ar paleziou-se ? Ha pa lavaran eur palez, ne lavaran ket re.

Gwelit St-Tegonneg, Pleiben, Gwimilio, Rosko, Sant-Yann-ar-Biz, Gwengat... ar Roc'h-Landerne... Nag a vuhez en traou maro-se ! Nag a sklerijenn a daolont war spered hon Tadoul !

Hon tud-koz o devoa eun doare d'ezo o unan da skeudenna an Ankou. N'eo ket eur falc'h eo a lakent d'ezañ etre e zivrec'h eskernek, met eur vriad birou (des flèches).

Evel-se eo emañ kizellet war garnel ar Roc'h. Eur vriad birou a zo gantañ dindan e gazel gleiz, hag gant e zorn dehou e silap anezo dirazañ, an eil war-lerc'h eben, en eur lavarout : « me ho lazo holl ! » Petra ' c'hell beza gwiroc'h ha taolennusoc'h, eus an Ankou, eget ar skeudenn-se ?

Gwechall e veze leun ar c'harneliou-se, a eskern tennet eus ar vered. An eskern-se, er garnel digor, a chome a-wel d'an holl. Er pînsinou tro-dro, e veze kavet dour benniget da deurel warno, dre maz aed ha dre ma teued eus an iliz, alies-alies e-kreiz ar vered. Ar pennoù maro, awechou, a veze laket e kasedou koat bihan, d'ezo furm eur chapelig, enno awechou daou benn : ar gwaz hag e bried. Eur skrid berr a lavare o ano, ha toullou er c'hased o leze war-wel. Seurt kasedou a vez kavet c'hoaz, en dro d'ar c'heur, e iliz-Veur Kastel-Paol.

Ar vuhez modern hé deus kavet dizoare lezel evel-se ar relegou war-wel. Pellaet eo bet ar heredoù diouz an ilizou ha goullonderet ar c'harneliou (2). Herio, peurvuia, ne gaver enno netra, nemet marteze, a bep seurt traou torret evel ma kaver er grignoliou koz dilezet.

Kristenien, bezomp leun a zonjañs evit palez ar maro. Chomomp stag ouz ar re dremenet dre an eñvor hag ar galon. Er garnel eo bet o chom relegou ar re o deus bet stummet an douar a rei d'eomp d'an eur-mañ magadurez ha danvez. Ar Spered o deus bet silet en hor c'horf eo a ra d'eomp sellet ouz ar bed-mañ evel ouz eun tremen, hag ouz ar bed-all evel ouz ar ger ma vevimp enni da viken gant Doue hag ar re dremenet.

V. S.

(2) Hervez Jos an Doare, ez eus c'hoaz er C'h du-N., Karneliou hag a falc'h o relegou, evel e Tregastel.



An Emgavadenn ziweza

Eun devez, p'edon o vale dre an tuchennou e-kichen Salonik, e welis dre an nor zigor, en eun ti war ribl an hent, eun hanter-dousenn bennak a dud, bodet en dro da gorf maro eur verc'hig astennet, war he gwele.

Wardro pemp bloaz e seblante beza, ken kastiz ha ken dister e oa. Ha koulskoude e oa dek vloaz ar verc'h, a lavaras an dud d'in.

Eno edo, evel eun delienn distaget diouz eur boked gweñvet, gwisket gant dilhad ken gwenn hag an erc'h, eur skerb gwer en dro d'he fennad-bleo.

Deuet e oa ar gerent d'an « emgavadenn » ziweza. Eur vaouez koz (ar vamm-goz hervez doare), daougrommet ha deuet da veza randonerez gant an oad, a oa o vont, harpet pounner war he fenn-baz, etredek ar verc'hig varo.

Eur pennadig e chomas eno, he muzelloù o krena. Hag, en eun taol-kont, e krogas da gana e gregach :

« A ! bokedig roz-aer bihan ! — Didrouz-kaer ha yen an er !

Selaou, bokedig bihan, selaou, — Ha lavar d'in ha teñvel eo ar wenodenn... »

Kredet em bije e oan em Bro-Skoz...

Lies-gwech ez oun bet aet evel-se d'ar pezh a anvomp e lavar hor bro « An emgavadenn ziweza », pa vez bet astennet evit mat izili an hini nevez-maro, pleget e zaouarn d'ezañ, ha graet kement hag a zo ret.

E vignoned, hini ha hini, a ya didrouz war-du ennañ, hag a lavar d'ezañ eur gomz bennak.

Soñj am eus da veza bet gwelet kement-mañ pa ne oan c'hoaz nemet eur paotrig daou vloaz : aotrou maro ar c'hastell, sebeliet gant ton, a oa bet lakaet war wel d'an dud en e sal vras.

Da genta e teuas e c'hoar, yen ha gwall-livet he fas, ken yen ha ken gwall-livet hag hini an hini maro war ar varvskaoñ. Hag hi da dostaat outañ, da stoui ha da lavarout a vouez izel eur ger bennak a genavo e pleg e skouarn yen sklas.

E wreg, neuze, eur vaouezig simudik ha bihan, prest atao da grena dirak an dud diavaez, a dostaas d'he zro, ha lentik he fozioù, a gomzas evel-hen :

« Ar galonad he deus savet he neiz,

Evel eul labous iskis, e-kreiz va c'herc'henn.

Teo an deñvalijenn war ar menez ha war al lenn !

Deus davedoun er-maez eus ar vro dilavar, o den karet ! »

Hag, eur wech-all, edon e ti-soul eur pesketaer kaez war ribl didud Loc'h Ness. Eun abardevez bennak gouez ha kintus a viz Kerzu e oa.

Ar mor, skourjezet gant taerijenn Avel an Hanter-Noz, ne oa mui nemet eur bern eon.

Eur vag-pesketaerez a oa bet eilpenet ha troet war he genou, e-kreiz an avel, a-bred, an deiz-se. Ha korf ar Ronald yaouank, ar pesketaer, hor boa kavet astennet dindan ar bezin luziet.

Liou ar souez o oa en e zaoulagad divuhez, evel ma n'em divije ket komprenet e c'helle ar mor-se ken karet gantañ, ar mor-se hag en devoa gourenet outañ ken alies, ar mor a fizie heñ ennañ abaoe amzer e vugaleach, c'hoari d'ezañ eun dro ken kamm a-benn ar fin.

Hag hounnez, ar plac'h a vije bet gwreg d'ezañ, ma ne vije ket bet eureujet heñ d'an Ankou a-raok, a zeuas d'an emgavadenn ziweza.

Stouet a-us d'ezañ, raoulet he mouez gant an anken a oa o krignat he c'hafon, ec'h en em lakaas da gana en hon lavar a Vro-Skos :

« Oan va c'halon ! war ziouaskell an noz ez in :

Na teñvalijenn na hirder an hent ne vint ket gouest d'am sponta.

Ho kavout a rin du-ze, er vro ouez, er vro ledan,

E-lec'h ma c'houez an avel lemm, disamm evel eun teuz ;

Ha tregerni a ray hor c'hoarz dre balez an Ankou,

En tu-all d'ar menezioù, d'ar stered ha d'ar mor lugernus. »

« Hanter-foll eo gant he anken », emezomp. Ha kercent ec'h ankouajomp he c'homzou. Hogen, dont a reas soñj d'eomp anezo antronoz, koulskoude, pa voe kavet he c'horf divuhez el lagenn zu, e-elec'h ma pleg gant an avel an haleg hag ar gwez liou d'an arc'hant beo.


Ha ni d'he lakaat en douar, diouz an tu diavaez da vur ar vered, rak tud kalet en hor c'hredenn ez omp techet da veza, ken lies gwech ha ne bec'homp ket hon-unan.

Hugh Sinclair.


Troet, gant aotre an oberour, e brezoneg Gwened gant Y. an Diberder, ha lakaet da c'houde e brezoneg hor bro gant Y. ar Gow.

DELLIG AR VINCIREZ


Eur son goz, war eun ton kaer meurbet, bet dastumet gant Yeun ar Gow, e Gouezeg.



O ! demat d'eoc'h tud an ti-mañ, O ! Landregona-



na. Dellig, Dellig, pelec'h emañ, diroula, diroulañ-



la Dellig, Dellig pelec'h emañ diroula kari- o- na.

O ! demat d'eoc'h, tud an ti-mañ,
O landregona !

Dellig, Dellig, pelec'h emañ ?
Diroula, diroulañla !

Dellig, Dellig, pelec'h emañ ?
Dirouloñ, kariona.

— Mar deo 'r bennherez a glaskit :
Hounnez a zo eur goantennig.

'Mañ-hi du-ze 'n he c'hamprig wenn,
O titira he bleo melen.

O titir' gant eur grib arc'hant :
N'her grafe ket anez m'eo koant.

— N'e ket ho pennherez 'glaskan.
Dellig, Dellig, pelec'h emañ ?

— Dellig, Dellig, ar baourez kêz,
Chomet amañ da vinorez,

A zo eur feumelenn gollet ;
Eet eo d'ar stêr, d'ar ster a-bred,

D'ar stêr da walc'hi he dilhad
Saotret ganti dec'h, en ebat.

— Ma ouijen-me an hent d'al lenn,
Aproui 'rafen ar feumelenn.

— Kerzit gant ar garrhent haleg :
Diouz trouz he golvaz he c'havfet,

— Demat d'eoc'h plac'hig 'tal al lenn,
C'houi a zaon kaer, c'houi a walc'h gwenn.

Deut ganin eun tammig er c'hoad,
Me a rojo d'eoc'h arc'hant mat.

— Me 'm eus eur breurig e pell bro,
Ha ma klevfe ho flipocho,

'Troc'hfe ho prec'h kleiz, ho prec'h ziou,
Da dôl da zribi d'ar siliou !

— Me eo ho preurig a bell bro,
'Zo deut amañ 'vit hoc'h aprô,

'Z deut amañ 'vit hoc'h aprou,
Digaset gant ar gwall-deotou.



KONTADENN BORTUGALEK

Per Kant

« Eur wech e oa, eur wech ne oa ket, hag eur wech e oa bepred ... »

Eun den en devoa eur c'hantad eus a bep tra : Kant ti, kant marc'h, kant bag, hag all...

Abalamour de - se e oa bet an den - se leshanvet : Per Kant.

Pinvidik e oa, pinvidik-mor.

E bried he devoa roet d'ezañ daou vab. Beva a raent eürus.

Edo heñ o chom en eur c'hastell, gant e wreg, dirak ar mor. Sellout a raent ouz o bigi o tistrei eus an donvor.

Goude eur pennad e lavaras Per d'e wreg :

— Lavarout a reer ez eus eun Doue. Mar deus unan, ha ma klaskfe-heñ lakaat ac'hanomp da vont da labour, ne c'hellfe ket hen ober. Sell' ta hepken ouz hor madou a welomp en-dro d'eomp ! Kement a zo anezo ma n'hellfemp biken dont da veza paour...

....

Goude ar c'homzou-se, Per avât, hag e berr amzer, a yeas e stal da netra.

Eun taol gwall-amzer a gasas trum e holl vagou da strad ar mor.

Eur barr-arne a bulluc'has e drevaioù ha ne eostas netra.

An tan a grogas en e diez ha ne chomas war e lerc'h nemet mogerioù suliet gant ar voged. Ken paour e teuas da veza ha ma oa pinvidik, setu ma rankas mont da glask an aluzenn.

Hag e pede an dud da gaout truez outañ, en eur lavarout :

— « En an' Doue roit da Ber Kant, a oa pinvidik-mor ha n'en deus mui netra ».

Breur Dominik.

AL LABOUR-DOUAR E BREIZ

abaoue hanter-kant vloaz

*Kendalc'h eus prezegenn an Ao. DE
GUEBRIANT e Bleun-Brug Kastellin.*

Eur vro binvidik.

En devez hirio, e meur a lec'h, emañ hon labour-douar, war reñk an departamanchou gwella eus Bro-C'hall.

E korn-broioù zo, e-lec'h m'eo mat an douar ha klouar a-walc'h an amzer ez eur en em laket d'ober legumachou a bep seurt.

Kant vloaz bennak a zo dija m'emañ korn-bro Rosko war ar roudenn-se.

Ken bras eo deuet da veza ar vroad a c'hounid herio legumachou prim, ma 'z eus re anezo alies evit ar goulenn a zo d'ezo. Koulz lavaret, a-hed ar mor, eus St-Malo da Wened, o c'haver : ougnoun e St-Brieg ; brikoli, artichaot e Pempoul, Landréger, Lannuon, Kastel-Paol-Rosko ; sivi e Plougastel ; pour e Pont-n-Abad ; kaol-poume en-Orient ha Gwened...

E kalz atañchoù, er C'hôtes-du-Nord hag er Finister, e vez kavet lin, koulz ha piz-bihan hag haricot.

Petra da lavaret, avât, eus an avalou-douar ? Bez ez eo, an dreyad ar muia gounezet, en amzer-mañ, e Breiz a-bez. War lez ar mor e kaver avalou-douar prim, met e kreiz an douarou ec'h eoster bep bloaz berniou avalou-douar-da zebri, ha kemend-all a avalou-douar had. Bez 'e c'hellan lavaret, ez eo galvet hor Breiz da rei da Vro-C'hall a-bez, an holl avalou-douar-had he deus ezomm, koulz ha da Afrika an hanternoz, ha da vroioù all c'hoaz ouspenn, gant ma vo a-du ganti politik ar C'hoularnamant. Amañ, war an dachenn-mañ, marteze, eo aet Breiz ar muia war-raok.

Breiz er penn kenta.

Pa daoler eur sell war a-dreñv, e chomer sebezet o welout pegement eo aet al labour-douar e Breiz war-raok. Emañ ganti ar maout, e Bro-C'hall. Lennit kentoc'h. Evit ar Finister :

E 1733 edo dilabour an hanter eus an douar.

E 1852 ez oa c'hoaz 520.000 deve arat dilabour.

E 1914 ne chom ken nemet 346.000 devez-arat.

Kemend-all a c'hellfer da lavarout eus an departamanchou all, ken e sav aoun ennomp ne vijed aet re bell war an difraosta.

Douarou 'zo, marteze, a vije bet gwelloc'h planta gwez enno, a rofe koad d'ober paper ha d'ober kasedou da gas legumach. An uzinou a labourfe warno, a rofe tro ivez da veur a hini da chom er vro da labourat.

Setu amañ testenioù all war araokadenn ar Finister.

E 1890 ez oa er Finister 100.000 devez-arat gwiniz.

E 1953: 144.000 devez-arat.

Ar muia ma 'z eus bet eo 170.00 e 1929. Prizioù re izel eo a gasas ar c'houlidigez war-a-dreñv.

Er Morbihan eo aet ar gwiniz eus 56.000 devez-arat e 1892, da 72.400 devez-arat e 1929.

Ezomm ebet da lavaret, en deus ar gwiniz, peurvuia, kemeret plas ar segal hag ar gwinizdu ; ar gwiniz-du, dreist-holl, koulz lavaret, a zo aet kuit eus ar Finister.

An eiz a zo aet ivez war a-dreñv, er Finister. Met er Morbihan hag er Ch.-du-Nord eo aet war-raok.

DAOULAGAD AR VAMM

AN Doktor Paol Nagai, eus Nagasaki (Japon, en e levr brudet « Kleier Nagasaki », araok displega distrujaden ar gêr vras-se, gant ar vombezenn atomik, a lavar d'eomp penaos eo bet gonezet d'ar feiz.

E gerent ne oant ket kristenien. Heulia a raent relijion broadel ar Japon. Kredi a raent e Doue hag e buhez peurbadus ar bed-all.

En eur ober e studioù war ar medisinez, Paol Nagai a gollas pep kredenn. Dont a reas da veza eur materialist. Ne gredé nemet en danvez. An den n'eo nemet korf ; ene ebet n'ez eus ennañ. Eur wec'h maro ar c'horf, echu eo ivez gant an den. N'eus buhez ebet en tu all d'ar bez : perak eta en em chala ; ret eo en em vataat eus holl blijadurioù ar bed araok beza tumpet en toull du...

« Hogen, emezañ, eur bloavez, e-doug vakansoù an nevez-amzer, e kouezas klañv bras va mamm. D'ar mare ma lammis e-harz he gwele, e chome c'hoaz enni, eun elfennig a vuhez.

Prestik, avât, e varvas, goude sellet ouzin e-pad hir amzer.

Ar sell diweza-se graet ouzin gant daoulagad va mamm, am strafuilhas krenn, hag a vrallas va c'hredennoù materialist.

An daoulagad-se, daoulagad ar vamm am lakeas er bed, am savas hag am c'haras betek penn, a lavare d'in difazi, ez oa bet aze ouspenn eget eur c'horf : a lavare d'in he doa va mamm eun ene, eun ene divarvel hag a oa bremañ e-kichen ene va zad er bed all.

Hag e sellen en daoulagad-se, me an hini ne grede nag e Doue nag e diaoul, hag e santen neuze ar feiz o tont ennoun, ar feiz he doa va mamm eun ene o veva en tu all d'ar bez.

Goude lidou diweza an douaridigez, deuet e oa bremañ an ti da veza sioul. Met ne oan mui ar memes den.

En desped d'ar sonjou all a virbilhe em faour-kêz penn, n'oan ket evit kredi e oa maro va mamm a-bez hag evit mat.

Evit ar wech kenta e tigare va daoulagad da vuhez ar spered. »

Digeri a reas daoulagad an Doktor Nagai, n'eo ket hepken da vuhez ar spered, mez ive d'ar feiz katolik. Dont a reas da veza eur c'hristen eus an dibab.

Skoet en e gorf, en e galon hag en e vadou gant bombezenn atomik an 9 a viz Eost 1945, e c'houzanvas e boaniou gant eur feiz souezus.

Pulluc'het d'ezañ e bried hag e di, e chomas klañv betek e varo gant daou vugel, paotr ha merc'h, o lakaat da dalvezout an nebeut a yec'hed a chom gantañ, evit mat e vreudeur.

Aet bremañ d'eur vuhez welloc'h, lezet en deus war e lerc'h skridoù a dalvoudegez, a gendalc'h da brezeg e feiz birvidik hag e garantez dispar.

V. S.



Pennherez Plonevez-Porze ha Korantin Trohano

*Ar werz-mañ, dastumet gant an Ilron An
MINOR, e bro ar Porze, a zo ganti liou mel-
konius ar mizioù du ha dourer tener an
Nevez-amzer.*

Gwerc'hez santel ar Sklerded, da c'houi Santez Anna,
Pa 'z oc'h bet e pep amzer, skoazell tud ar vro-mañ,
Sklerijennit va spered, ma kanin kent mervel,
Va buhez gant va mestrez, d'am breudeur Breiz-Izel.

Me a zo eun den yaouank a ganton Kastellin,
Am eus choazet da vestrez, eur plac'hig a blij d'in :
Hi a gar mat ac'hanoun, me a gar anezi ;
Gredan ket ve karantez ken bras hag hon hini.

Tre bourc'h Ploneve-Porze ha kerig Lokronan,
Am boa gwelet da genta, va mestrez Mari-Jann,
E traonienn v Rao sant Mikêl, eul lec'h darempredet
Gant kalz tud o kerc'hat dour evit tud ha loened.

El lec'h-se eo e kanè, gwechall, hon tadou-koz,
Meuleudi priñs an Elez a zo er Baradoz.
Eno hon eus 'n em welet hag en em brometet,
Hen eo ar c'haera devez am eus amañ beyet.

Eur burzud bras oa gwelet kaerder he yaouankiz,
He diou jod ruz oa freskoc'h 'vit roz dindan ar gliz ;
He daoulagad ker koantik, eun diskuiz o gwelet,
Me gred eo grêt gant Doue evit beza karet.

N'eus ket e-barz an Arvor, kennebeut en Argoad,
Eur plac'hig ken vertuzus, na ker koant na ken mat.
Me a zonj d'in he gwelet koulz en deiz hag en noz,
Hag alies he skeudenn am luskell da repoz.

Ne sav ket war ar bed-mañ, hed an dourioù a red,
Bleunienn a zo da veza en he c'hichen lakeet ;
N'eus outo 'met en Neñvou e jardin an Drinded,
E lec'h ma tiskuiz ar just hed ster an eërusted.

Eur plac'hig yaouank ken fur, eur gened ken dispar,
Ne zeblant ket beza grêt 'vit buhez an douar.
Kaout eur plac'hig evel di da dremen e zeizioù,
'Zo mezvi er blijadur 'n eun draonienn a zaelou.

Mar fell d'eoc'h-c'houi, tud yaouank, anaout ar plac'hig kaer,
It d'ar Palud da welet gwir Vamm-Goz Hor Salver,
Da zevez ar pardon bras oc'h sur d'he c'haout eno,
O pedi a greiz kalon Patronez vat hor bro.

Er Palud me vez ive, hon daou en em gavomp.
Berr e kavomp hon amzer, n'eus forz pelec'h ez eomp.
Er bloaz-mañ e oamp mintin ; da gan an alc'houeder
E taoulinomp e iliz Mamm-Goz vat hor Salver.

✱

Diou goulmig en em heuilh mat da dremen ar stankenn,
O sonjal repoz er c'hoad, war ar memez gwezenn,
Pa 'n em gav ar chaseour, o c'hondaon da vervel :
Eur skeudenn eus hor buhez, tud yaouank Breiz-Izel...

Allaz ! Allaz ! n'em gavet eo ganeomp ar chaseour ;
Ampoezonet hor buhez gant eur gwall deod treitour ;
Mar'-Janig, va c'harantez, red eo 'n em zilezel,
Te koulskoude ar gaera eus merc'hed Breiz-Izel...

Karout hep beza karet a ro poan ha glachar,
Petra n'eo ket disparti etre daou en em gar !
Gras Doue ha Mar'-Janig, er bed ne glasken ken.
Kenavo d'an eürusted, er bed-mañ da viken.

Me 'm eus douret eur rozenn, he dalc'het pur ha flamm,
Hag oun taolet a gostez gant he zad hag he mamm.
An hini a blij d'ezo, mar gell he darempred,
He c'haso sur da wenvi dindan nêrz heol ar bed.

Perak leñva, Mar'-Janig, me oun nemet eur paour ;
An hini 'zo deut d'ho klask en deus arc'hant hag aour.
Me 'wel gwernioù e gastell a sav kazi en oabl :
Laouen eo e tleit beza o kaout fortun ker mat.

— Kontant vijen da gaout gant va hini danvez ;
Met klask a ran dreist pep tra ar feiz hag ar furnez.
Eun den difeiz er bed-mañ a zo eur vag hep stur :
Plac'hig hag a fiz ennañ, a-dra-sur n'eo ket fur.

Holl e kavomp gwall amzer war mor ar vuhez-mañ.
Petra ray 'ta ar vagig n'eo dalc'het gant netra ?
Pa sonjer an nebeuta ez a gant eun taol herr
Da vruzuna esperans war ar rusta reier.

✱

Klañv gant an dristidigez, va fenn stouet izel,
Ez is eun deiz hep sonjal da draonienn sant Mikêl :
Eul lec'h ganin ken karet a ra dont em spered,
Gwasoc'h c'hoaz eget kentoc'h va amzer dremenet...

Amañ e vijen laouen o c'hoari, o redek
Pa oan er skol, yaouankik, gant an aotrou Rozeg ;
Amañ 'm eus gwel't Mar'-Janig evit ar wech kenta,
Va buhez holl 'zo skrivet war yeod an draonienn-ma.

Eno chomas Korantin, deut d'ezañ an derzenn,
Ken 'oa savet al loar evit rei sklerijenn ;
Douget d'ar gêr voe neuze, lakeet en e wele...
Mervel 'ra an den yaouank, pevar devez goude !

Pa oa o vont da vervel e teuas an Elez
D'e sikour war an tremen 'vit chench rouantelez,
Evit rei d'ezañ kalon e kanent holl eur son,
Ne gaver 'met e nao geur, dirak an Tri-Ferson.

Pa glevas ar bennherez kelou eus e varo,
E lavaras 'n eur ouela : « Korantin Trohano
'Zo bet e-pad e vuhez an dibab eus an dud,
Paour a vadou an douar, bevet en deus divrud.

Karout a rae e Zoue 'vel eur c'hristen gwirion ;
Karout a rae e nesa 'vel eun den a galon ;
Karout a rae ac'hanon 'vel eur mignon fidel ;
Me esper c'hoaz e gavout er vuhez eternal.

Pa 'z eo maro ya mignon, Korantin Trohano,
D'ar blijadur er bed-mañ, kenavo ! Kenavo !
Mont a ran da Sant-Brieg, da c'houlenn ar c'houef gwenn,
Da c'houlenn ar chapeled ha d'ober pinijenn.

Korantin a gousk bremañ, e peoc'h Doue er bez,
D'an hanter-noz d'an iliz e bered Plonevez.
Pa vo spontet ar maro gant ar son kreñv ha rust,
E tihuno goustadik gant mousc'hoarz an den just.

Yann Kergoat.



KORNIG AR VUGALE

N'EUS BRASOC'H KARANTEZ...

(E brezoneg eeun)

YAOUANK c'hoaz e oa aet Rumont Kolbe da vanac'h. Eun deiz e reas e sonj kuitaat e Urz. Met neuze e teuas e yamm da gemenn dezañ e oa-hi hag he fried o vont d'o zro da lavarout kenavo d'ar bed.

Adal an amzer-se e reas an Tad Kolbe eus e wella evit sevel kazetennou dre ar bed-holl en enor d'ar Werc'hez. Ken ez eo bet graet anezañ : Foll an Itron Varia.

D'ar 17 a viz C'houevrer 1941, e teuas eur c'harr-tan dirak dor ar Fransiskaned, e Niepokalanov (Polonia). Tri Alaman a oa ennañ. Diskenn a rejont hag unan anezo skei war dor an ti. Eur Breur a zigoras dezo. — « An Tad Kolbe, mar plij. » Hemañ a zeuas. — « Meulet ra vezo Jezuz-Krist ! » emezañ. — « An Tad Kolbe ez oc'h-c'houi ? — Ya. — Mat, it dirazomp. »

Kaset e voe da Pawiak, eur prizon bras, kalz a dud ennañ dija. Eur wech, e teuas er gambr m'ed enni an Tad, unan eus mistri ar prizon. Pa welas eur sae-manac'h ez eas droug ruz ennañ. Paka 'reas an Tad dre e chapeled : « Krenner, penn-foll, pezh-fall, lavar din : Ha kredi 'rez e Jezuz-Krist ? — Ya, kredi 'ran », a respontas-heñ, laouen. Gant e holl nerz e tistagas an Alaman gantañ eun taol-dourn war e zremm (fas). Ma santas an Tad blaz ar gwad en e c'hepou.

« — Ha kredi 'rez c'hoaz ? — Ya, sur, kredi 'ran. » Eun eil taol, hag unan all, hag unan all. — « Ha kredi 'rez atao ? — Ya, atao ! » Taoliou adarre. Koueza 'reas ar manac'h war an douar. An Alaman a ya dezañ a daoliou botoù. Evel maro e chomas an Tad war al leur. E zremm ne denne mui da hini eun den. Neuze e redas kuit an den drouk.

Pa c'hellas sevel, e lavaras an Tad d'e gamaraded : « Bezit laouen ganin ; evit an eneoù eo, evit ar Werc'hez Vari hep pec'hed ! »

D'an 28 a viz Mae, e voe kaset an Tad Kolbe da gamp gwall-vrudet Auschwitz. Eno e ranke labourat start, daoust d'e yec'hed fall : dougen, en eur redek, kefiou-gwez teo. Bep gwech ma koueze e veze skoet warnañ betek ma save. Met eun deiz ne c'hellas mui sevel, Kaset d'an ospital, e tibabas al lec'h falla : e-kichen an nor ; met evelse 'wele ar re varo o tremen hag e pede evito. E-pad an noz e kofesae ar re glañv. Dezo e roe ivez e voued.

D'an 30 a viz Gouere 1941, en em laeras eur prizoniad. Peogwir ne voe ket kavet en-dro, e voe dibabet dek den da veza kaset da gambr an naon, da c'hortoz o maro. Unan anezo en em glemme : « Petra 'zeuy da veza va maouez ha va fevar bugel ? »

An Tad Kolbe a dostaas neuze ouz-mestr ar c'hamp : « Va lezit da gemer lec'h unan eus an dud-se. — Piou out-te ? — Eur beleg. — Pehini anezo e fell dit kemer e blas ? — Hennez hag en deus pevar bugel. — Perak ? — Koz oun ha mat da netra. (47 bloaz 'oa.) Hag heñ a zo yaouank, gant gwreg ha bugale. — Mat ! »

Setu an Tad Kolbe hag an nao prizoniad all serret e kambr an naon... hag ar sec'hed. Betek neuze, ne veze klevet eno nemet mouezioù evel re tud

kouezet en ifern. Ar wech-mañ e klevet pedennou ha kan ; klemmou ivez, met malloz ebet.

Pemzek deiz goude, pa voe digoret an nor ne oa beo nemet an Tad. Lazet e voe gant eur bikadenn. Hag e chome evel kousket, e zremm sioul-kaer, sklerijennus... Devet 'voe an dek-korf.

« N'eus brasoc'h karantez eget rei hor buhez evit hor mignon. » (Aviel.)

K. Riou (13-9-51).

KELEIER

HOR SKOL DRE LIZER

Goude eun tamm bruderez graet er journaliou evit hor « Skol dre lizer », ez eus deuet d'eomp eur bern goulennoù. 93 hon eus bremañ war roll hor skolidi ! Biskoaz n'hon eus bet kement !! Daoust hag e ve Breiz o tihuna da vat ?

Setu amañ eus a belec'h eo ar skolidi-se :

Finister : Leskonil, Landerne, Kerfeunteun, Klohars, Brest, Plogonneg, ar Gilvineg, Moutrouiez (2), Plougonven, Plouyann, Porzsall, Guilers (Brest), Pont-n-Abad (3), Ploneour-Lanvern, Loktudi (2), Sant-Tegonneg, Hanveg, Konkerne (2), Kemperle (2), Kerlouan, Sant-Divi = 27.

Côtes-du-Nord : Trezeny, Gwengamp (2), Sant-Ke (2), Lamballe, Tremargar (3), Dinan, Pempoul (2), Plounez, Louargat, Sant-Brieg (2), Laurenan, Plougiel, Tre-meven, Pledeliag, Cohiniac, Landreger = 22.

Morbihan : Gidel, Gourin (2), an Oriant, Groe, Santez-Anna-Wened (2), Sant-Gweltas-a-Rhuys, Sant-Nicolas-du-Tertre, Josselin, ar Faouet, Lokmikelig (2) = 14.

Lez'hiou all : Roazon (9), Langeais, Dinarz, Fougères, Guipry, Vitre, Naoned (2) = 16.

Diavaez Breiz : La Flèche (Sarthe), Merignac (Gir.), Le Havre, Aulnois-sous-Laon (Aisne), Paris (3), Toulouse, Rouen, Banyuls (Pyr.-Or.), Bas-Thorenc (A.-M.), Mortagne (Orne), Le Mans, Indochina = 14.

War an niver-se hon eus 29 maouez. Gant en eiz skoliad a chom ganeomp abaoe warlene, an dra-se a ra en holl evidomp 404 skoliad. Lodennet eo ar skolidi-se etre K. Riou, kelenner e Baod (Morb), an Ao. Kalvez, rener-skol e Ploueg-ar-Mor (C.-du-N.), ha V. Seite, Bleun-Brug, Kastellin.

An darn vuia eus ar skolidi a zo re yaouank, da vihana dindan 35 bloaz. Bez ez eus anezo studierien, micherourien, komversanted, labourerien-douar, medisined, apotikerien, kelennerien, implijidi, soudarded, martoloded, kloareged, beleien...

Darn eus al liziri hon eus bet a ziskouez eur garantez wirion evit Breiz. Setu, da skouer petra 'skriz André M. (J.A.C.) :

« ...Très attaché à la bonne terre de notre chère Bretagne, aimant intensément ses coutumes, ses traditions si riches de sens humain et chrétien, ses fêtes riches de beauté, il me manque tout de même de savoir cette langue chérie... »

Je serai heureux de partager le bonheur qui doit déborder du cœur d'un vrai Breton de race et de cœur, de connaître, de parler, d'écrire la langue de sa Mère : la Bretagne. »

Digant eur soudard :

« ...Da 12 vloaz em eus kuitaet Breiz... Met va c'henta yez, yez ar Vretoned, a zo chomet start em c'halon. Kement paper, follenn pe levr skrivet e brezoneg a lamman gantañ gant plijadur vras... »

Ar pezh a rafe ar muia plijadur d'in eo kaout levrioù brezonek a bep seurt da amprest... » — (J. Ar C'h.)

Ne echufen ket ma rankfen embann pennadoù mat pep hini. A-walc'h evit herio.

AR BREZONEG ER SKOL

Ar skolioù-mañ o deus kaset d'eomp keloù eus ar c'hentelioù brezonek a roont d'o bugale : Pouldergat (merc'hed), Plougar (m.), Plougonvelin (m.), Tre-flez (m.), Plouzevede (m.), Kerfeunteun (m.), Ploumoger (m.), Sant-Divy (m.), Hanveg (m.), Kerlouan (m.), Ar Folgoat (paotred), Skolaj Gwengamp, Milizac (p.).

Kaset ez eus bet levrioù brezonek war hor c'houst da : Pouldergat : 20 Yez hon Tadou, 15 Me a zesk brezonek, 10 Le Breton par l'image, 2 Kontadennoù. — Hanveg : 1 Yez hon Tadou, 1 Le Breton par l'image. — Ar Folgoat : 30 Me a zesk ar brezonek. — Milizac : 16 Yez hon Tadou, 20 Konchennoù. — Sant-Vaze, Kemper : 20 Yez hon Tadou. — Plouezeg (C.-d.-N.) : 10 Le Breton par l'image, 6 Yez hon Tadou. — Tremargar : 3 Le Breton par l'image. — Gourin : 1 Yez hon Tadou.

Digant eur renerez-skol :

« ...Aimant beaucoup notre langue bretonne, et en ayant suivi pendant deux ans les cours par correspondance de M. Séité, je me fais un plaisir, autant qu'un devoir de l'enseigner de mon mieux... » — (S^r C. J.)

« Kas a ran keloù d'eoec ez eus bet graet skol vrezonek du-mañ ivez, warlene, a-hed ar bloaz, e lise Sant-Servan. Re a skolidi a oa, ha n'em eus ket gallet kelenn an holl re a felle dezo labourat war hor yez... » (Paol Kentel.)

Setu eur c'helou mat, a zigas d'eomp P. K. Bennoz Doue d'ezañ. Ra vo heuliet skouer Sant-Servan gant holl skolioù Breiz-Izel da vihana :

Eürs omp ivez da rei da c'houzout en deus hor c'henvroad P. K. Kinniget, nevez a-walc'h 'zo, diou dezenn diwar-benn ar brezoneg, dirak Skol-Veur Paris. Bez' e c'heller o goulenn digantañ (rue de la Marne, Riancourt, Saint-Servan). Plijet gantañ, evit-se, digemer hor gwella gourc'hemennou.

Eus skolaj Sant-Salver, Redon, e kemennar d'eomp c'hoaz, e vez graet ingal, skol vrezonek gant hor Mignon F. Marquer. Eur skouer all muioec'h da Vreiz-Izeliz.



AR GOUELIOU BREIZAT

N'on ket bet 'e gouelioù ar Bleun-Brug, er bloavezh-mañ. N'em eus ket gallet mont. Marteze n'eo ket falloc'h evidon, peogwir n'em eus ket gallet kennebeut mont d'ar C'hendalc'h an daou zevez araok. He setu perak.

Pep hañv eur boas da aoza e Breiz, e Breiz-Izel dreist-holl, gouelioù bras ha kaer kenañ, war zannev braoderioù ha koantizoù ar vro. E-touez ar gouelioù-se emañ, dreist d'ar re all, gouelioù ar Bleun-Brug ha gouelioù Kerne Kemper. Ma vefen bet e Kastellin, d'an 2 a viz Eost, em befe bet evel an holl va gwalc'h a zudi hag a levez, hep soñjal marteze e poanioù hag e diaesterioù ar re a oa bet o sevel seurt gouel. Hag e vefen aet kuit, laouen va spered ha dic'hoant va c'halon, o virout evit eur pennad mat eur soñj c'houek ha saourus eus ar gouelioù tremenet. Soñj awalc'h am eus c'hoaz eus Bleun-Brug diweza Kastell-Paol, ha dreist-holl eus hini Lokorn, a voe evidon eun diskuliadur eus gwir ene Breiz (abadenn ar sadorn da noz, gant tao-lennou beo ar Barzaz-Breiz, prosesion ar goulou, an oferenn war menez Sant Ronan dindan eun oabl seder ha leun a stered). Ha goude ?

Moarvat, — karout a rafen fizia, — an darn vrasa eus an dud a ya d'ar Bleun-Brug a ya evel-ma 'z int boaz da vont da bep seurt abadennoù a vez roet e pep lec'h, hag a-hed ar bloaz, evit diduamant an den. Daoust ha santout a ra lod anezo, evelato, ne vez ket aozet gouelioù ar Bleun-Brug evit ar blijadur hepken, na zoken evit ar blijadur da genta ? Ha santout a reont ez eo great ar gouelioù-se evit krenvaat pe elumi enno ar garantez evit Breiz ha kement tra a ra he braventez : feiz, yez, spered, boazioù ? Ha skiant a zeu d'ezo ez eo ar gouelloù-se eur c'halvadenn d'ar Vretoned a ya d'o gwelout, eur c'halvadenn da virout ha da groski herez o zadou, eur c'halvadenn da lakaat ha da implijout en o buhez n'falvoudigezioù a vez diskullet d'ezo ?

Ave emañ an dalc'h, rak eur gudenn a zo, diwar-benn ar gouelioù breizat. An estrañjourien ne glaskout en hor gouelioù peurliesañ nemet o dudi. Tapout a reont evelato, mbarvat, eur gentel vat bennak. Met evidomp-ni, Bretoned, hor gouelioù ne dalvezont deomp nemet ma 'z int kurunidigez eur vuhez vreizat pemdeziek, pe ma henchont ar Vretoned da viroùt ha da seveni kement tra a ra o fersonelez (1) hag o zalvoudegez dirak daoulagad Doue hag ar bed.

Rak-se, — ha kredi mat a ran e tisplegan soñj Kevredigez ar Bleun-Brug hag he diazezeur, — ar gouelioù aozet gant ar Bleun-Brug a die beza kurunidigez eul labour kaset da benn, en he ser, e-doug ar bloavez, gant ar muia a Vretoned ma ve gallet. Neuze e kement ar gouelioù-se o gwir dalvoudegez. Er maez eus prezegennoù ha kenstrivadegoù ar c'hendalc'h bloaveziek, al labour bouc'het gant Kevredigez ar Bleun-Brug, en he bodadegoù studi, a die eta kenderc'hel, mont war grek hag en em urzia dre ar vro a-bez. Dav e vefe ober allesoc'h seurt bodadegoù, ha sevel kreizennoù labour e kement lec'h ma vefe tu. Ha pa vefent savet, ne vefe ket awalc'h c'hoaz. Arabat e chomfent tra eun nebeut tud hepken. Eur bobl a-bez a die dont, a nebeudou, da gemer perz en eur sevenadurez adkavet hag oc'h advleunia.

Neuze e vezo hor gouelioù skeudenn wirion buhez ha levenez Breiz, ha n'eo ket ar maskaradennoù a vez rebechet deomp a-wehou.

Melard.

(1) Personelez : personnalité.



BUHEZ AR BLEUN-BRUG

Eur vodadenn bouezus a zo bet e Boulvriag d'an 2 a viz Du, dindan renadur an Aotrou Cadoudal, hag an Ao. Floc'h, aluzener ar « Bleun-Brug » evit Sant-Brieg.

Pedet e oa bet da zont d'ar vodadenn-se beleien ha tud all eus Bro-Dreger, Kerné, Goelo, a-du gant ar « Bleun-Brug ».

Daoust d'an amzer fall, eun daou ugent bennak a dud a en em vodas en-dro d'an Aotrounez Cadoudal ha Floc'h.

Araok kregi, an Ao. Erwan ar Zant, kure Boulvriag, a voe anvet sekretour ar vodadenn. An Ao. Floc'h a reas neuze eur gozeadenn war ar « Bleun-Brug ». Poueza reas dreist-holl, war brezegenn hon Tad Santel war ar folklor, a zo eun darvoud pouezus bras evit ar « Bleun-Brug », dre m'emañ ar c'homzou-se, kement a du gant roll-labour ar gevredigez, displeget ken fraes e « Qu'est-ce que le Bleun-Brug ? » bet embannet e 1951.

Visant Seite a gomzas goude eus gouelioù ar « Bleun-Brug ». Diskouez a reas n'eo ar gouelioù-mañ nemet ar frouez eus eur bloavez a labour kuz war draou Breiz.

An Ao. Kerk, person Buhulien, o komz warlerc'h a lavaras penaos lakaat an dud d'en em staga ouz ar « Bleun-Brug » : ober d'ezo kemer perz er c'henstrivadegoù. Poueza reas dreist-holl war kenstrivadegoù ar re vras : Prezeg, kana, kontañ.

Da 13 eur e voe servichet eur pred laouen tre, gant rener-skol Sant-Anton. Ar brezoneg, evel-just a voe yez an holl. An Aotrounez Floc'h, Ar Zant, Ar Moun, ha sakrist Boulvriag hon dudias hag hon diroufennas gant o c'hanaouennoù.

Da 15 eur e kroge al labour en-dro. Pouezus bras e voe prezegenñ an

Ao. Kalvez war « Ar Brezonek er skol ». Keuz hon eus ne vije ket bet eno, ouz e selaou, holl skolaerien ha skolaerezed ar c'horn-bro. An Ao. Kalvez a zo rener-skol. Aanout a ra e vicher. Gouzout a ra ivez petra 'c'heller da ober war dachen ar brezoneg. Daoust d'ar « programmou » beza reut, an neb a gar a c'hell, evelato, ober eur plas d'hor yez.

Warlerc'h ar brezegenn-se e voe diazezet Komite « Bleun-Brug » eskopti koz dandeger : Prezidant : an Ao. Cadoudal ; Sekretour : an Ao. Erwan Ar Zant ; Teñzorier : Per Even, eus Gwengamp. — Karget eus ar skoliou : an Ao. Kalvez ; eus al lazou-kana : an Ao. Goasdoue ; eus ar c'helc'hiou : an Ao. Kuvén ; eus ar bruderez : an Ao. Klerk. Unan dre ganton a voe anvet euspenn, da sikour kas an traou en-dro.

Parrez Pleuvian a voe dibabet evit sevel « Bleun-Brug » Bro-Dreger 1954. Barrek omp eno da gaout skoazell vat digant Bleun-Brugerien a galon evel an ao. Thos, person ar barrez ha brezoneger ampart, a brezegas e Bleun-Brug Landreger, hag an ao. Ar Gall en deus nevez embannet eul levrig kantikou kaer e meur a vouez, a rento kalz servich d'al lazou-kana diwar ar-maez. O goulenn digantañ.

Divizet eo bet ivez, e vo roneoskrivet eur follenn drimiziek evit Bleun-Brugerien eskopti Sant-Brieg.

Echui a ra ar vodadeg war kan « Ar Vro goz », Kenavo, tud vat ! Eun dervez eo hemañ hag a gont e buhez ar « Bleun-Brug ».

V. Y.

KORN AL LIZIRI

« ...Eun nevezenti am eus da gemenn d'eoc'h. Dimezet eo va mab Alan d'eur plac'h eus Baen (Bain-de-Bretagne), bet renerez ar J.U.B. »

An eured, e Baen a zo bet laouen tre ha breizek. An agraou a c'hoarias tonioù breizek. Me a ganas daou gantik e brezoneg : « O na hir eo an noz » ha « Kantik ar Baradoz »...

Pa sonjan, penaos e meur a iliz e Breiz-Izel, zoken er parrezioù el lec'h ma oar an holl brezoneg, ne vez klevet hirio nemet sonerezh ha kantikou gallek !! Eun druez !... Daoust ha n'eo ket eno ober goap, ober fae war kaerde-riou bet kanet ha savet alies gant sent eus hor Bro !

An ambrougadeg dre ar vourc'h a oa renet gant bombard ha binioù. Dansou breizek a zo bet ivez. Tud ar vro a oa estlammnet ha laouen... »

Bennoz Doue d'hor c'henlabourer mat, Evnig-Penn-ar-C'hoad, evit ar c'heleier laouen-se, hag hor gwella gourc'hemennou d'an daou bried nevez.

C'hoariva.

An Ao. Lorig, kure Sant-Turio (Morb.) a lavar d'eomp al labour vat graet gant e strollad war dachenn ar c'hoariva. Klevit kentoc'h :

« ...C'hoarierien Sant-Turio o dao roet e 1950 « An Ozeganed » et Sant-Turio hag e Moréac. « Ar Hemener » c'hoarier et Sant-Turio e 1951 ; roet ivez gant ar memez strollad e Bleun-Brug Santez-Anna, hag e 1952 et B. B. Baod, da heul « An dapenn dour ».

E 1953 hon eus roet « Boéh er goéd » (Mouez ar Gwad) pezh-c'hoari savet gant ar Bayon, e Sant-Turio (2 wech) ; en eil gwech e voe c'hoarier dirak an Ao. meur Bayon, vikel vras ha Komite ar B. B. Roet eo bet c'hoaz ar memez abadenn e Melrand, Kistinic, Moustier, Remengol, Gemene, Bubry, Moreac. »

C'hoari a raint, a-benn Nedeleg a zeu : « Ar Hent Betleem » eus an ao. Bayon. Abadenn d'an 20 ha d'ar 27 a viz Kerzu.

Hor gwella meuleudi d'an Ao. Lorig evit ar pezh en deus graet, ha d'an Ao. Lohier da veza e sikouret. Ra gendalc'ho war an hent-se.

Le Gérant : Abbé BLEUNVEN, Curé de Saint-Renan. — Tirage : 1.800 exemplaires.

QUIMPER, IMP. CORNOUAILLAISE. — C.F.P.P. N° 21697




PHOTO JOS LE DOARÉ

GWEZENN AN ANAON

Eur c'hiz souezus a gaver e Plougastel-Daoulas. E karterioù 'zo e virer gwez evel an hini a weler amañ : eur bod kelenn plantet avalou war beg ar brankou.

Ar wezenn-se, da c'houel an anaon a vez laket e bann er c'hontre gant an tiegez en doa anezi abaoe ar bloavez araok. Mont a ra gant an hini a laka ar priz uhela, hag an arc'hant a dalvez da lakaat oferennou evit ar re varo. D'he heul e vez gwerzet mouchoueradoù avalou evit ar memez tra. Mont a ra bep bloaz, evelse, Gwezenn an Anaon, eus eun ti d'egile, evit distrei, a-benn 5, 6... 10 vloaz, d'ar memez lec'h, hervez niver an tiez a zo er c'hontre.